



**DISKLERIADUR VALÈNCIA  
KEVREADOÙ ELEN (European Language Equality Network)**

24 a viz Mae 2014

**Sevel Unvaniezh Europa al liesyezhegezh  
o toujañ da ingalded a dalvoud an holl yezhoù**

- 1) Savet eo bet Unvaniezh Europa gant Stadoù a zo bet o vrezeliñ e-pad pell kenetrezo evit diazezañ o c'halloudoù,
- 2) Broioù Europa o deus fellet dezho astenn o c'halloud war ar bed dre an impalaerouriezh, an drevadennerzh, o tegas d'o heul gouennlazhioù, sklaverezhioù, marc'had ar re zu ha torfedoù niverus a-enep an denelezh
- 3) Unvaniezh Europa a zo hi diazezet war dalvoudoù an demokratelezh, gwirioù Mabden ha peurgetket gwirioù an dud ezel eus minorelezhioù (mellad 2 ar Feur-emglevioù).

An talvoudoù-se a zoujañs evit dellezegezh mabden, a frankiz, a ingalded, a Stad a wir, ne c'hellont ket bezañ lakaet da dalvezout nemetken evit ar re a zo ezel ar brasañ niver hag ar galloud ganto, Rankout a reont talvezout d'an holl geodedourion, hag en un doare resis d'ar re a zo ezel strolloù pe pobloù minorezhel dindan c'halloud hag a zo dezho o yezhoù o-unan hag a vev o sevenadurioù dezho e diabarzh Unvaniezh Europa.

- 4) D'ar mare ma vez dalc'het ar votadegoù evit kannaded Parlamant Europa, ar c'hevredadoù nann gouarnamantel (KNG) strollet gant ELEN, Rouedad Europa evit Ingalded ar Yezhoù, a c'halv an holl gannaded hag an holl Stadoù da zoujañ penn-da-benn d'ar pennaennoù hollvedel a zo e diazez an denelezh, evit kement den, hep diforc'h a yezh hag a vezañs en ur vinorelezh,
- 5) Ar c'h-KNG strollet e-barzh ELEN a damall en un doare ispisial riskl un emglozañ grevus warno o-unan a-berzh ar Stad-broadoù hag a zo bet o kas war-raok brezelioù etre familh ar pobloù, an impalaerouriezh, an drevadennerzh hag ar gouennlazhioù diasantus,
- 6) Tamall a reont al lazhoù-pobl a zo bet graet gant ar Stadoù, da lavarout eo distruj ar yezhoù ha sevenadurioù suj kaset war-raok gant ar sistemoù ren evit sevel Stadoù unvanaet,
- 7) Gervel a reont da sevel, e-giz m'eo posubl, un Europa demokratel ha liesyezhek, o toujañ da c'hoant ar pobloù da vevañ dre o yezhoù ha sevenadurioù liesseurt, er c'henseskemm hag er c'henskoazell,
- 8) Embann a reont o youl start, muioc'h eget biskoazh, da labourat asambles evit ur bed diazezet war bennaennoù an doujañs hag ar c'henskoazell etre an holl bobloù, o vont davet an dud hag en darempred strizh gant an aozadurioù etrevroadel a zo en o c'hefridi dazont hor blanedenn, ha gervel a reont an holl dud a youl vat da zont ganto war an tu-se.



## **DÉCLARATION DE VALÈNCIA DES ORGANISATIONS DE ELEN (European Language Equality Network)**

24 mai 2014

### **Construire une Union européenne du multilinguisme dans le respect de l'égalité de toutes les langues**

- 1) L'Union européenne s'est construite sur la base d'États qui se sont fait longtemps la guerre entre eux pour assoir leur domination,
- 2) Les pays européens ont aussi voulu étendre leur domination sur le monde par l'impérialisme et la colonisation, entraînant génocides, esclavages, traite négrière et de nombreux crimes contre l'humanité,
- 3) L'Union européenne est, quant à elle, fondée, sur des valeurs de démocratie et de droits de l'Homme, y compris de droits des personnes appartenant à des minorités (article 2 des traités),

Ces valeurs de respect de la dignité humaine, de liberté, d'égalité, d'État de droit, ne peuvent s'appliquer uniquement au bénéfice des personnes appartenant aux majorités dominantes, Elles doivent s'appliquer à tous les citoyens, et en particulier à ceux qui appartiennent à des groupes ou à des peuples minoritaires ou dominés qui possèdent leurs propres langues, et qui expriment leurs propres cultures au sein de l'Union européenne,

- 4) Au moment où se déroulent les élections des députés au Parlement européen, les ONG réunies dans ELEN, Réseau Européen pour l'Égalité des Langues, appellent tous les députés et tous les États au respect intégral de ces principes universels qui fondent l'humanité, pour toutes les personnes, sans distinction de langue ou d'appartenance à une minorité nationale,
- 5) Les ONG réunies dans ELEN dénoncent en particulier le grave risque de repli sur soi des États-nations qui ont été à l'origine des guerres fratricides entre les peuples, de l'impérialisme, du colonialisme et de génocides inacceptables,
- 6) Elles dénoncent les ethnocides que ces États ont aussi perpétrés, c'est-à-dire la destruction organisée par les systèmes dominants des langues et des cultures dominées, dans le but de l'unification des États,
- 7) Elles appellent à la construction possible d'une Europe démocratique, multilingue, respectant l'aspiration des peuples à vivre dans leurs langues et cultures diverses, dans le dialogue et la solidarité mutuelle,
- 8) Elles affirment leur volonté, plus que jamais déterminée, d'œuvrer collectivement pour un monde fondé sur les principes de respect et de solidarité entre tous les peuples, en travaillant auprès des populations, et en étroite relation avec les organisations internationales qui ont en charge l'avenir de la Planète, et appellent toutes les bonnes volontés à les rejoindre en ce sens.



**DECLARATION OF VALÈNCIA**  
**BY ELEN (European Language Equality Network) ORGANIZATIONS**

24<sup>th</sup> May 2014

**To build a multilinguism European Union  
respecting languages that are all equal**

- 1) The European Union is built on the basis of States that waged war one on another for a long time to strengthen their domination,
- 2) The European countries also wanted to extend their domination over the world by imperialism and colonization, leading to genocides, slaveries, slave trade and many crimes against humanity,
- 3) The European Union itself is based on values of democracy and human rights, including rights of the people belonging to minorities (article 2 of the treaties) :

These values of respect for human dignity, freedom, equality, rule of law, cannot only apply to the advantage of people belonging to the dominant majorities,  
They must apply to all citizens, and in particular to those who belong to groups or to minority or dominated peoples having their own languages, and expressing their own cultures within the European Union,

- 4) While elections of Members of the European Parliament are taking place, NGOs gathered in ELEN, the European Language Equality Network, call all members of Parliament and all States to full compliance with these universal principles founding humanity for all people, without distinction of language or membership in a national minority,
- 5) NGOs gathered in ELEN particularly denounce the serious risk of withdrawal of the nation-states that were at the origin of fratricide wars between peoples, of imperialism, colonialism and unacceptable genocides,
- 6) They denounce ethnocides that these States also have committed, that is, organized destruction by the dominant systems of dominated languages and cultures for the purpose of unification of States,
- 7) They call for the possible construction of a democratic, multilingual Europe, respecting the aspiration of people to live in their different languages and cultures in dialogue and mutual solidarity,
- 8) They affirm their will more than ever determined to work collectively for a world based on the principles of respect and solidarity among all peoples, working with the populations, and in close relation with international organizations having responsibility for the future of the planet, and do call all people of goodwill to join them in this direction.